

JUJAMMANT

AR MÈVIER

DIRAC TRIBUNAL DOUE

Voar ton : *Santez Mari mamm Doue, etc.*

DOUE a gomz.

Sell, piou ta n'em gaf aman, d'ar c'houlz-man deuz ann
 A bez bro he z'eo heman, n'a deuz a bez contre ? [de ?]
 Parfumin ra dioutan eur c'hoez zo effroyabl !
 Creuvet eo gant ar boesson, ar paour quez miserabl !

ZANT PÆR

Piou, ma Mæst-mad eo c'hennez? ann autre Yan-Gorfad,
 Clevet peuz comz dioutan énn mil a mil debat
 A ve gret en ho palez, bemde divoar he benn,
 Goaz calz, autre, eo c'hennez, vit potr he archant goenn.

DOUE

Ze n'eo quet eur guir-lavar, ret eo laqad enn priz
 Vertuyo mad ann denn-man, c'oulz evel he voall viz,
 Rog ma rin he jugeammant m'e renco guelet sclær,
 P'he z'eo payan, p'he ghristen, clevet a rez te Pær.

ZANT PÆR

A belec'h, Mæstr, a c'halfe bezan eu chrislen-mad !
 Croaz à bet, n'ha chapelet, voar he gorf na zo cad,
 Diou garten, eun dominen, eur yalc'h, eur c'horn butun,
 Gant'he: daou pe dri goennec, ina Mæstr, tristan fortun !

DOUE

N'eo quet avoalc'h kement-se, Pær, na ned ket re brim
 Examinomp da gentan, ha gret henn deuz nep crim.
 Furoc'h calz eo ann denn-man, me gret, vit na zonjet,
 N'eo ket ho tastuni mada-hanned, eo n'em foueltrst,

ZANT PÆR

Deut eo guenec'h, Mæst divin, pez a lerret zo gouir,
 Biscoaz mui na brononzchoc'h, ô nann, ajustoc'h guir,
 N'eo quet o tastum mado, e z'eo n'em beriset :
 Zivoas ! ouz ho goal dispigno, execraphan portret !

DOUE

Petra ra dit, malheruz, cozeal er guiz-se,
 Ma talc'hjet tout da dastum, den a bet na fautje,
 Peb den a vije pinvik, den nini na vije paour,
 Abredic, vije crachet var ann arc'hant, ann aour,

ZANT PÆR

C'hoaz a fell dac'h en zouten, ma Mæstr-mad, me voel-ze
 Mar p'he clevet he bried, clevet e vugale
 O c'hober dac'h ann tenor deuz ar celerral-man,
 A losquefe ho creden hac ho fianç hennan,

DOUE

Hac ancoezet a tens-te petra eo ar groague ?
 Ha petra, enn peb amizer, e z'eo ar vugale,
 D'ar vamm he talc'hont respet, mæz nou pas mui d'ann
 Me gred, boue ma zout intaon, ya Pær, te a gaf grad.

ZANT PÆR

Ya, Mæstr, roet ton dean, ma crenveo e gauz,
 Hemman, lec'h mont d'ann ifern, a yell d'ar bargadoz,
 Goude dispigna ha fruqan oll goeneyeu ann ty.
 Mezant c'hoez ar gouin-ardant stag c'hoaz ouz bec hefri

DOUE

Pær buan n'em distromplet, rac me ya voar ho cauz.
 Hemmau debre a cfe, coulz en de, vel, en noz.
 A rente mad ar c'honverz, dre lec'h ma tremene.
 Ma na vije nep dispign den a bet na venye.

ZANT PÆR

Ma mill benoz a voar'noc'h, clevet ret-hu Sire.
 C'hoant peuz raffe, enn'dévn, enn nep guiz he antre.
 Ann dean-maan n'ho paradoz, ann dervez a herrie.
 C'hed da laqat ar revolt toez ho sœnt ho c'hæle.

DOUE d'ar MÈVIER

Pebez glac'har evidoc'h, zivoaz ! dac'h ma den quez !
 Me meus eur bagad eynet aze, n'eur memes nez, [mesq]
 N'ingn quet vit zouffr a in'hev, z'hé, c'hantrefac'h enn ho
 Goal diez hingt da c'houarn, rac ar vanden a gresq.

Vel ma zoc'h bet charitabl, tre ma oac'h voar ar bed.
Ma c'hefec'h meur a daquen, tebrec'h liez a bred,
Gomzan quet dac'h a yunnio: ze na voâ quet d'ho cond,
Qenebeut a vigelo, na gomzan mui du tout.

Na fell quet din bo jugin, n'ha donet d'ho condaouen,
Met, epqen, dre eur justic, vidoc'h ar muan scaon,
Zant Pær, vit guir a glêmo, mez ingal he ze din,
Me zonj tre ma vin Doue em falez mæst a vin,

Drouc pedet peuz a voar'n'hon, evit gouir goej pe goej,
Calz zo herrie enn ifern, hanval voac'h hac a vlej
Ha m'ho casfen d'ar plac's raffen nemert justic,
Couscoude ua c'houlan quet cresquin dac'h ho suppliz,

Sul-vui enn dezinorec'h, bemde, dirac au dud,
Sul-vui collect'eb estime hac a tappae'h goall-vrud.
Den na greded'ho comzo, ho jileo en nep giz,
Discoczet c'hoaz a vijec'h, d'ann oll, gant pen ar biz.

Vel ma z'eo ho pinijen commancet pel a zo,
M'oc'h euz gret voar ann douar, calz a binigenno
Entre bezan trubuillet, couquot eno noz er mez,
Bezan pillet ha faerret, m'ho salvo ma den quez.

Mill a mill goech peuz yunet, ya, en defaut a dreo,
Peb tra tout a ancoezec'h, eur vœj ma vijec'h meo.
Yun a vouet hac a dillat, o ma vijec'h bet jich.
N'ho poa quet quement souffret, penoz c'houi din a blich!

Tre ma voant voar ann douar, me, ive, meuz bet poan,
Penevert ma voant Doue a mijie bet calz doan,
Dirac ann henebourien, a glasque oll ma c'holl,
C'houi, ma mignon zo collet, zivoaz ! ganteur vroec foll,

Ho, vel ma oac'h attaqet, eunn tam'm re ean ho penn.
Evit miret ar silanz, tevel mik, p'he a grenn,
A preferec'h, avoejo, mont d'ann hosteleri.
Hac enn lec'h cad plijadur, gavec'h nemert ennu.

Quement tacquen a efec'h hini na gevec'h mad,
Denn na garje possedim, n'hag anvian ho stad ;
D'ar guer c'hoaz pa retornjac'h mui-ouz-mui pijs croz,
Ho croeg-foll zo kiriec, mar peuz gret meur dol boz.

Lezet Zant Pær da fringtal, da dansal en he blaç,
P'ha bac'h ket d'ar baradoz, me gafo, plac d'ho caç
Me meuz eur placiq-bian, zo hanvet purgatoar,
Quement ya dy da doman dalc'h dioutan memoar.

Tri mis tremenet enn'ho, vit gouir n'eo ket tri de,
Nann, n'ha qenebeut ter zun, nann na taëf heur ive,
Eur plac eo evit goennan quement tra a zo du,
Ed da goll c'hoez ar boesson, ma c'chantrefet dioust'hu,

ZANT PÆR

Noc'h quet justima, Mæstr divin, rein d'ann denn-ze he
Da galz honestoch'ovit han o'ch euz refusel plœç [c'hraç]
Neo quet enn ter minuten a rei rei he binijen,
Na vin mui voar ho palez, ma Mæstr mad gardien

Me ro dimission, clevet red, hu sire,
Na c'houlan quet diraz'ho, poullierren ho groague,
Rullierren enn andoursio, d'a pemde n'ha d'ar zul.
Brutaloch voa ann denn-man vit hanevel p'he vul.

DOUE d'ar MÈVIER

Querz d'ann douar, ma mignon, d'ober c'hoaz eunn tam
Ef gist ar peç'garri, tre ma vo avalo, mes diavo[stro], lu[
Mes diavo[stro], d'amm blasphem'in, da boulial mui da vroeg
N'em c'hasi quet ordinal, ebars n'eur memez pleg.

AR. MEVIER

Trugare dac'h Mæstr divin, ya me a dalc'ho zonj,
Peguen rust he ar vary-ze a zo voar veg ho cronch,
Heman zo din eur vizit meuz bet ho vezan meo
Calz a zonje voant maro, ha chetu me c'hoas ben.

Hanter veuzet n'em guelen, zivoas din digant ann dour,
Mil drugare d'un duil, en zo dent d'em zicour,
Rag goelel a meuz patant, p'he meuz frenzel,
Penoz a voant, gant Doue, d'ar flammo condaonnet

Mez, p'ne meuz tappet achap tre dorvoan he justic,
Ha retorn c'hoaz d'ar vue reglen ann honestiz
A vezo ma gouir reglen tre ma vin voar ar bed,
Adieu, crênn d'ar baoac'ho, nann, mui taqen a bet.

MINOUZ a gomz.

Hir a ve ma c'hanouen ma falchsen d'he c'héntan.
Hepgen, en peder sagen a fell din he fakan,
Ma c'halin vit eur goennec rein ann'hez'hi da leunn,
Da guement he deziro, nep ceutim mui ouspenn.

Ha piou, benag a dezir gouzout pe gleyet piou
A zo bet n'em impliet gant plu, paper ha liou
Da scriva eur sort recit vit he c'haç d'ar mouler
E z'eo me, Yaho ar Minouz, bargic bian Treguer

IANN AR MINOUZ

(Propriété de l'Auteur).

Lannhuon, enn ty intanevez Ar Goffik, levrer.